



Sekretour-ez divyezhek ar velestradurezh-skolaj G/M

Kinnig labour embannet d'an / ar mardi 31 mars 2026

Lec'h : **Gwiseni**

Doare post **CDI** H/F

01/06/2026

Deskrivadur ar post-labour

Ur c'hevread kevredigezhel, laik, digoust ha digor d'an holl eo Diwan. Hiziv an deiz ez eo an hentenn gelenn nemeti o kinnig deskiñ brezhoneg dre soubidigezh. Krouet ouzhpenn 48 vloaz zo ez eus e Diwan 48 skol, 7 skolaj ha 2 lise, dasparzhet war 5 departamant Breizh istorel.

Emañ ar Skolaj Diwan Gwiseni o klask ur sekretour-ez divyezhek ar velestradurezh-skolaj (G/M). Dindan atebegezh renerezh an ti skol e kenlabouroc'h gant holl izili skipailh ar skolaj : renerezh, buhez skol, skipailh kempenn, kelennerien, dilenidi Kuzul merañ ar skolaj. Fiziet e vo ennoc'h kefridioù liesseurt.

Goulennet e vo ganeoc'h ober war dro :

Sekretourva boutin

Degemer an dud war-eeun ha dre bellgomz ha kas anezho e darempred gant an dud dave.

Degemer ha treuzkas al lizhiri.

Degemer ha treuzkas ar mailoù.

Sekretourva pedagogel

Ebarzhiañ an holl ditouroù a bouez evit ar familhoù, merañ an teuliadoù enskrivañ, kas anezho d'ar familhoù hag ober war dro enrolladur ar skolajidi en diazezoù akademikel. Dreist-holl e-barzh SIECLE (Système d'Information pour les Elèves en Collèges et Lycée pour les Etablissements) a zo un diazez pouezus tre evit skoliadur ar skolajidi.

Daremprediñ gant ar rektordi diouzh an ezhommoù : teuliadoù kelennerien, enskrivadurioù DNB, beajoù...

Sevel pe prientiñ a bep seurt teuliadoù a sell an ti skol hag e vont en dro, da skouer (listenn diglok) : raktres niver a vugale, yalc'hadoù, treziad diavez (forfait d'externat), steuñv an emgavioù pedagogel, heuliañ ar gevrat gant ar stad.

Kenlabourat a dost gant kontouriezh an ti skol evit a sell faturenniñ ar familhoù ha merañ ar bourchaserien.

Kehentiñ

Sevel teulioù kehentiñ diabarzh/diavez a bep seurt : mail titouriñ (familhoù, kelennerien) pedadennoù, adgalv, sevel rentaoù kont

Bezañ perzh en aozañ a bep seurt darvoudoù a sell buhez an ti skol : devezhioù dizolioñ ar Skolaj gant skolioù ar c'hentañ derez, an dorioù digor, devezhioù degemer evit ar skolidi CM, hag all.

Titouroù all

Deiziad enfredañ : Penn kentañ miz Even

Doare kevrat : CDI

Padelezh amzer labour : 28e/siz bloazieket

Gopr : diouzh ar skiant prenet ha diouzh ar c'haelioù o talvezout e Diwan

Ehan gopret : 6 sizhunvezh ha sizhunvezhoù nann labouret da bet prantad vakañsoù skol
Lec'h labour : Skolaj Diwan Gwiseni, 10 hent an atalieroù 29880 GWISENI

Ma z'och dedennet gant ar post, trugarez da gas ho emstrivadur a-raok an 30/04/2026 (CV + lizher emginnig) da tuta@diwan.bzh pe kit war lec'hienn Diwan, ivinell « Dibab Diwan » -> « Labourat e Diwan » ha loskit hoc'h emstrivadur (CV+Lizher en em ginnig).

Skiant-prenet ha barregzhioù goulennet

Doare den

Un diplom war ar sekretourva mui 2 pe 3 bloavezh skiant prenet war an danvez a vo ret kaout evit dec'hel ar post-mañ.

Evit ar post-mañ eo ret bezañ evezhiek, emren ha bezañ aes gant an dud.

Ret e vo deoc'h mestroniañ ar poelladoù-mañ : word, excel, google workspace.

Bez ho po da implijour ivez poelladoù all a sell merañ an ti skol (Pronote, poelladoù akademiezh).

Bez e rankoc'h eta bezañ en ho aes gant an urzhiatarez.

Evel just eo ret deoc'h mestroniañ ar brezhoneg kenkoulz dre skrid ha dre gomz evit bezañ dibabet, live B2 (DBY) d'an nebeutañ.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://diwan.versio.fr/br/offres-emplois/secretaire-d-administration-scolaire-bilingue-h-f-310320261639>